

PEDENNOU DIOUZ AR MINTIN

E Kerne.

En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet gret.

M'oc'h ador, ma Doue, ma c'hrouer,
M'oc'h ador, Jezuz, ma Zalver ;
Hirio ha keit ha ma vevin
Ho servicha humbl'a fell d'in.


M'ho trugareka, ma Aotrou,
Evit oc'h oll inadelezoù ;
D'am beza krouet, konservet.
Prenet, enn Iliz resevet.

Kement a rin, a livirin,
A zonjin hag a andurin,
A ofran holl da c'hloar Doue,
Dreizoc'h, Mari, mam a drue.

Me a bromet en em viret,
Gant gras Doue, diouz peb pec'hed
Hag observi lezen Doue
Evit plijout d'he vajeze.

O ma Jezuz, sellit ouzin
Ha roit d'in ar pezh a fell d'in ;
Roit d'in ar c'hras d'ho karet bepred
Hag ar c'hras oc'h ofansin ket.

Guerc'hez Vari, mam benniget,
Var ma maro ma zikouret,
Guerc'hez Vari, mam da Zoue,
O pet truez ouz ma ene.



Ha c'houi, ma El-mad, kannad Doue,
Miret ma c'horf ha ma ene,
Ma miret ouz an drouk-spered
Ha dreist peb tra diouz peb pec'hed.

Ma faeron, ne veritan ket
Dougen an hano a zouget;
Gouizkoude, pa'm euz an henor,
O pet truez ouz ho fillor.

Ma maeronez, ne veritan ket
Dougen an hano a zouget;
Mes me ho ped, ma maeronez,
O pet sonj euz ho fillorez.

Jezuz, Mari ha Joseph, Anna ha Joachim,
Sant Mikael, ma El-Mad, sant Per, sellit ouzin;
Ma faeron, santez Barba, gloriuz sant Korantin,
Brema ha var ma maro o pet truez ouzin.

Pater noster, qui es in cœlis, sanctificetur no-
men tuum; adveniat regnum tuum; fiat voluntas
tua, sicut in cœlo et in terra. — Panem nostrum quo-
tidianum da nobis hodie; et dimitte nobis debita
nostra, sicut et nos dimittimus debitoribus nostris;
et ne nos inducas in tentationem; sed libera nos a
malo. Amen.

E brezounek: Hon Tad, pehini zo en env, hoc'h
hano bezet santifiet; ho rouantelez deuet d'eomp;
ho polontez bezet great var an douar evel en env. —
Roit deomp hiriô hor bara pemdeziek; ha pardou-
nit deomp hon offensou, evel ma pardounomp d'ar
re o deuz hon offenset; ha na bermetit ketre kouez
femp e tentasion; mes hon dilivrit diouz an drouk
Evelse bezet great.

Ave, Maria, gratia plena, Dominus tecum, be-
nedicta tu in mulieribus, et benedictus fructus ven-

tris tui, Jesus. — Sancta Maria, mater Dei, ora pro
nobis peccatoribus, nunc et in hora mortis nos-
træ. Amen.

E brezounek: Me no salud, Mari, leun a c'hras,
an Aotrou Doue a zo ganeoc'h, benniget oc'h dreist
an oll graziez, ha benniget eo ar frouez euz ho korf,
Jezuz. — Santez Mari, mam da Zoue, pedit evidomp
pec'herien, breman hag en heur euz hor maro.
Evelse bezet great.

Credo in Deum Patrem omnipotentem, creatorem
cœli et terræ, et in Jesum Christum, Filium
ejus unicum, Dominum nostrum, qui conceptus est
de Spiritu Sancto, natus ex Mariâ Virgine, passus
sub Pontio Pilato, crucifixus, mortuus et sepultus;
descendit ad inferos, tertiâ die resurrexit à mor-
tuis, ascendit ad cœlos; sedet ad dexteram Dei
Patris omnipotentis, inde venturus est judicare
vivos et mortuos. — Credo in Spiritum Sanctum,
sanctam Ecclesiam catholicam, Sanctorum commu-
nionem, remissionem peccatorum, carnis resurrec-
tionem, vitam æternam. Amen.

E brezounek: Me gred e Doue, an Tad oll-c'hâl-
loudek, krouer an env hag an douar; hag e Jezuz-
Krist he Vab-unik, hon Aotrou; a zo bet konsevet
euz ar Spered-Santel, ganet gant ar Verc'hez Vari,
hen deuz gouzanvet dindan Pons-Pilat, a zo bet
krusifiet, maro ha seheliet; a zo diskennet d'an
iferniou; ha resussitet an trede deiz euz a varo da
veo; a zo pignet en envou; hag azezet en tu deou da
Zoue an Tad oll-c'halloudek; ac'hano e feui da varn
ar re veo hag ar re varo. — Me gred er Spered-San-
tel, en Iliz santel katolik; kommunion ar Zent; re-
mission ar pec'hejou; resurreksion ar c'hig; ar vuez
eternel. Evelse bezet great.

Confiteor Deo omnipotenti, beato Mariae semper virgini, beato Michaeli archangelo, beato Joanni Baptistae, sanctis apostolis Petro et Paulo, omnibus Sanctis (et tibi Pater), quia peccavi nimis cogitatione, verbo et opere; — mea culpa, mea culpa, mea maxima culpa. Ideo precor beatam Mariam semper virginem, beatum Michaellem archangelum, beatum Joannem Baptistam, sanctos apostolos Petrum et Paulum, omnes Sanctos, orare pro me ad Dominum Deum nostrum.

E. brezounek : Me govez ouz Doue oll-c'halloudek, ouz ar Verc'hez gloriuz Vari, ouz an Aotrou sant Mikael, arc'hel, ouz an Aotrou sant Ian-Vadezour, ouz an ebestel sant Per ha sant Paol, hag ouz an holl Zent, abalamour m'am euz pec'het braz dre zonj, dre gomz, dre ober : — dre ma faot, dre ma faot, dre va brasa faot. Rak-se e pedan ar Verc'hez gloriuz Vari, an Aotrou sant Mikael arc'hel, an Aotrou sant Ian-Vadezour, an ebestel sant Per ha sant Paol, hag an oll Zent da bedi Doue evidoun.

GOURC'HEMENNOU DOUR

1. Eun Doue hebken a adori
Ha dreist peb tra oll a gari.
2. Heb kaoz he hano na doui ket,
Nag ive netra all ebed.
3. Miret a ri an oll zuliou
Gant euvrou mad ha pedennou.
4. Da dad, da vam a enori,
Ha da vuez a astenni.
5. Ha mir na lazi den ebed
Nag a galon, nag a effet.
6. Lubrik mir na vezi nepred,
Dindan hoan da veza daonet.
7. En em ziuoull diouz laeroni,
Na dommach da hentez na ri.

8. Na geier na fals testi
Mir birviken na liviri.
9. Ne c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag e sonj vil n'en em bliji.
10. Madou ar re all ne zezir ket
Evit ho c'haout heb guir ebet.

*Setu aze
Gourc'hemennou Doue,
Lezen a garante,
Vit silvidigez hon ene.*

GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ

1. Kleo devot a ben-da-ben,
Bep sul, bep gouel, ann offeren.
2. Neuze peb labour a lezi,
Evit da Zalver henori.
3. Kovez a ri, da vihana,
Eur vech er bloaz heb nac'h netra
4. Ha da Bask, e sakramanti,
Rak-se e stad vad e vevi.
5. Iun a ri an daouzek deiziou,
Ar c'horaz hag ar vijilou.
6. Na da zadorn na da vener,
Ne zebri kig e neb amzer.

LITANIOU JEZUZ

Kyrie, eleison.
Christe, eleison.
Kyrie, eleison.
Jesu, audi nos.
Jesu, exaudi nos.
Pater de caelis, Deus, miserere nobis.
Fili, redemptor mundi, Deus, miserere nobis.
Spiritus Sancte, Deus, miserere nobis.
Sancta Trinitas, unus Deus, miserere nobis,
Jesu Fili Dei vivi,

Jesu splendor Patris, miserere nobis.

Jesu candor lucis æternæ,

Jesu rex gloriæ,

Jesu sol justitiæ,

Jesu fili Mariæ virginis,

Jesu amabilis,

Jesu admirabilis,

Jesu Deus fortis,

Jesu pater futuri sæculi,

Jesu magni consilii angele,

Jesu potentissime,

Jesu patientissime,

Jesu obedientissime,

Jesu mitis et humilis corde,

Jesu amator castitatis,

Jesu amator noster,

Jesu Deus pacis,

Jesu auctor vitæ,

Jesu exemplar virtutum,

Jesu zelator animarum,

Jesu Deus noster,

Jesu refugium nostrum,

Jesu pater pauperum,

Jesu thesaurus fidelium,

Jesu bone pastor,

Jesu lux vera,

Jesu sapientia æterna,

Jesu bonitas infinita,

Jesu via et vita nostra,

Jesu gaudium angelorum,

Jesu rex patriarcharum,

Jesu magister apostolorum,

Jesu doctor evangelistarum,

Jesu fortitudo martyrum,

Jesu lumen confessorum,

Jesu puritas virginum,

Jesu corona sanctorum omnium,

Propitius esto, parce nobis, Jesu

Propitius esto, exaudi nos, Jesu.

Ab omni malo, libera nos, Jesu,

Ab omni peccato,

Ab irâ tuâ,

Ab insidiis diaboli,

A spiritu fornicationis,

A neglectu inspirationum tuarum,

A morte perpetuâ,

Per mysterium sanctæ Incarnationis tuæ,

Per nativitatem tuam,

Per divinissimam vitam tuam,

Per labores tuos,

Per agoniam et passionem tuam,

Per crucem et derelictionem tuam,

Per languores tuos,

Per mortem et sepulturam tuam,

Per resurrectionem tuam,

Per sanctissimæ Eucharistiæ institutionem tuam,

Per gaudia tua,

Per gloriam tuam, libera nos, Jesu,

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, parce nobis,

Jesu

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, exaudi nos, Jesu,

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, miserere nobis, Jesu.

Jesu, audi nos.

Jesu, exaudi nos.

OREMUS

Domine Jesu Christe, qui dixisti: petite et accipietis, querite et invenietis, pulsate et aperietur vobis, quæsumus, da nobis petentibus divinissimi tui amoris affectum, ut te toto corde, ore et opere diligamus, et à tuâ numquam laude cesserimus. Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum. Amen.

Angelus Domini nuntiavit Mariæ,
 Et concepit de Spiritu Sancto. — *Ave Maria.*
 Ecce ancilla Domini,
 Fiat mihi secundum verbum tuum. — *Ave Maria.*
 Et Verbum caro factum est,
 Et habitavit in nobis. — *Ave Maria.*
 Ÿ. Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix,
 ñ. Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS

Gratiam tuam, quæsumus, Domine, mentibus nostris infunde, ut qui, angelo nuntiante, Christi Filii tui incarnationem cognovimus, per passionem ejus et crucem ad resurrectionis gloriam perducamur. Per eundem Christum Dominum nostrum. Amen.

PEDENNOU DIOUZ AN NOZ

E Kerne.

En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
 Evelse bezet gret.

M'ho trugareka, ma Aotrou,
 Evit oc'h oll madelezou :
 D'am beza krouet, konservet.
 Prenet, en Iliz resevet.

Roit d'in, va Jezuz, guir c'houlou
 Evit anaout ma fec'hejou ;
 Sonjit, ma ene, em offansou,
 Euvrou, komzou, sonjezonou.

Keuz am euz da veza offanset
 Ma Doue din da veza karet.
 Me a bromet d'en-em viret,
 Gant gras Doue, diouz peb pec'hed

(*Querc'hez Vari, etc., pagen 4, beleg Litanioù.*)

LITANIOU AR VERC'HEZ

Kyrie, eleison.
 Christe, eleison.
 Kyrie, eleison.
 Christe, audi nos.
 Christe, exaudi nos.
 Pater de cœlis, Deus, miserere nobis
 Fili, redemptor mundi, Deus, miserere nobis,
 Spiritus Sancte, Deus, miserere nobis.
 Sancta Trinitas, unus Deus, miserere nobis.
 Sancta Maria, ora pro nobis.
 Sancta Dei genitrix,
 Sancta Virgo virginum,
 Mater Christi,
 Mater divinæ gratiæ,
 Mater purissima,
 Mater castissima,
 Mater inviolata,
 Mater intemerata,
 Mater amabilis,
 Mater admirabilis,
 Mater boni consilii,
 Mater Creatoris,
 Mater Salvatoris.
 Virgo prudentissima,
 Virgo veneranda,
 Virgo prædicanda,
 Virgo potens,
 Virgo clemens,
 Virgo fidelis,
 Speculum justitiæ,
 Sedes sapientiæ, ora pro nobis.
 Causa nostræ lætitiæ, ora pro nobis.
 Vas spirituale,
 Vas honorabile,
 Vas insigne devotionis.

Rosa mystica,
 Turris Davidica,
 Turris eburnea,
 Domus aurea,
 Fœderis arca,
 Janua cœli,
 Stella matutina,
 Salus infirmorum,
 Refugium peccatorum,
 Consolatrix afflictorum,
 Auxilium christianorum,
 Regina angelorum,
 Regina patriarcharum,
 Regina prophetarum,
 Regina apostolorum,
 Regina martyrum,
 Regina confessorum,
 Regina virginum,
 Regina sanctorum omnium,
 Regina sine labe originali concepta,
 Regina sacratissimi Rosarii, ora pro nobis.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi. parce nobis,
 Domine.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, exaudi nos,
 Domine.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, miserere nobis.
 γ. Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix.
 α. Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS

Defende, quæsumus, Domine, beatâ Mariâ semper virgine intercedente, istam ab omni adversitate familiam et toto corde tibi prostratam, ab hostium propitius tuere clementer insidiis. Per Christum Dominum nostrum. Amen.

Sub tuum præsidium confugimus sancta Dei Genitrix; nostras deprecationes ne despicias in

necessitatibus sed a periculis cunctis libera nos semper, Virgo gloriosa et benedicta.

Evil an Anaoun.

De profundis clamavi ad te Domine; Domine, exaudi vocem meam.

Fiant aures tuæ intendentes in vocem deprecationis meæ.

Si iniquitates observaveris, Domine: Domine, quis sustinebit?

Quia apud te propitiatio est, et propter legem tuam sustinui te, Domine.

Sustinuit anima mea in verbo ejus; speravit anima mea in Domino.

A custodia matutinâ usque ad noctem, speret Israël in Domino.

Quia apud Dominum misericordia, et copiosa apud eum redemptio.

Et ipse redimet Israël ex omnibus iniquitatibus ejus.

Requiem æternam dona eis, Domine, et lux perpetua luceat eis.

Requiescant in pace. Amen.

OREMUS

Fidelium, Deus omnium conditor et redemptor, animabus famulorum famularumque tuarum remissionem cunctorum tribue peccatorum, ut indulgentiam quam semper optaverunt piis supplicationibus consequantur: Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum. Amen.

An Angelus e brezounek.

Eun Arc'hel a berz an Aotrou
 A ziskennas euz an Envou (bis).
 D'annons da Vari oa choazet
 Evit mamm da Zalver ar bed. (bis)

Mari a respountaz neuze :
 Servicherez oun da Zoue,
 Bezet great eta em andred
 Hervez m'oc'h euz d'in annonset.

Neuz e konsevez eur bugel
 Dre vertuz ar Spered-Santel,
 Hag ar Verb en em inkarnet
 Etouez an dud en-deuz bevet.

Pedit, Mam zantel da Zoue,
 Evidomp oll he vajeste,
 Ma vezimp din euz ar grasou
 A bromet Jezuz, hen Aotrou.

En amzer zantel a Bask :

En em gonzolit evit mad,
 Rouanez euz an envou ;
 Sec'hit pelloc'h ho taoulagad
 Hag arretit ho taelou :
 Resusitet ez eo ho Mab
 Leun a c'hloar, a driomphou.

— Alleluia ! Pebez joa
 D'oc'h-hu Mam a garantez
 D'eomp-ni ivez, alleluia !
 Pebez laouenedigez,
 He velet, goude hor prena,
 Adarre, leun a vuez !

Ia, Guerc'hez, bezit joaiuz,
 O pet konsolasion,
 Resusitet ez eo Jezuz,
 Hervez he brediksion.
 Dirazban Mam drugateuz,
 Roit d'eomp ho proteksion.
 — Alleluia, etc.

Va Doue, o resusita
 Ho Mab Jezuz, hon Aotrou,
 E karghoc'h ar bed a joa.
 Grit d'eomp dre he veritou
 Ha re an Itron Varia
 Mont holl da c'hloar an envou.
 — Alleluia, etc.

ANGELUS

Ni ho salud gant karantez,
 Rouanez ar Zent hag an Elez ;
 C'hui a zo benniget,
 O pia,
 Hag a c'hrasou karget,
 Ave, Maria !

Ra vezo benniget Jezuz,
 Ar frouez euz ho horf evuruz !
 Kanomp gant an Elez,
 O pia,
 He veuleudi bemdez,
 Ave, Maria !

Ni ho ped, Mari, guerc'hez c'flan,
 Pa vezimp yar hon tremenvan.
 Da c'houlen ouz Jezuz,
 O pia,
 D'eomp eur maro euruz,
 Ave, Maria !

PEDENNOU DIOUZ AR MINTIN

Evit tud Leon.

En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet great.

O Tad, Mab ha Spered-Santel,
Me gred oc'h eun Doue eternel,
Krouer an oll, partout prezant,
Me oc'h ador devotaman,

Me gred oc'h tri fersoun divin,
Ho zri ker braz, ker fur, ker din,
Distink an eil diouz egile,
Eun Doue ho zri, noun pas tri Doue.

Me gred oc'h just ha galloudus
Da rei d'ar viz ha d'ar vertuz
Dioc'h ar mirit ar rekompans.
Punision diouz an offans.

Me gred an inkarnasion
Ha mister hon redempcion ;
C'houi, Mab Doue, en em c'hreat den
Evit prena'n natur humen.

M'hoc'h ador, Jezuz, va Zalver, -
Er sakramant euz-an aoter ;
Me gred emaoch enhan prezant
Gwir den, guir Doue realamant.

Konsakri a ran va dervez
D'ho kloar ha d'am zilveridigez,
Hag ec'h offans va oll boaniou,
E pinijen d'am fec'hejou.

Pater, Ave, Credo, Confiteor.

GOUR'HEMENNOU DOUE

1. Eun Doue hebken a adori,
Ha dreist peb tra oll a giri.
2. E vean he hano na doui ket,
Nag ive netra all ebed.
3. Ar zuliou santel a viri
E servich Doue, ouz he veuli.
4. Da dad, da vam, a henori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Dioual na lazi den ebed,
Nag a zezir, nag a effet.
6. Lubrik na vezi ket ivez,
Nag a gorf, nag a volontez.
7. Laerez na miret madou den,
E gouiziegez na ri biken.
8. A enep den fals testeni
Na gaou ebed na liviri.
9. Ne c'hoanta dre luksur pec'ht
Nag e sonj vil n'en em lezi.
10. Na souhet madou da hentez,
Evit ho c'haout dre fallentez.

GOUR'HEMENNOU AN ILIZ

1. Ar goueliou berz a zantifi,
Neuze peb labour a lezi.
2. Ha kleo devot a ben-da-ben,
Sul ha gouel berz, an offeren.
3. Eur vech er bloaz, da vihanâ,
E kovesai heb nac'h netra.
4. Ha da Grouer a resevi,
Da Bask, devota ma c'helli.
5. Iun a ri an daouzek deiziou,
Ar c'horaz hag ar vijilou.
6. Kig, nemed ha zeiz Nedelek,
Guener ha zadorn ne zebri ket,

Litanïou Jezuz, Angelus.

PEDENNOU DIOUZ AN NOZ

Evit tud Leon,

Konsakri a ran va nozvez
D'ho kloar ha d'am zilvidigez
Hag ec'h offran va oll boaniou
E pinijen d'am fec'hejou.

Eksaminomp hor c'houstians.

Pardoun, va Doue trugarezuz,
Pardoun, en hano va Jezuz
Keuz am euz'balamour d'ehoc'h.
Gant ho kras me jencho peilloc'h.

Guerc'hez Vari, guir vam Doue.
C'houi zo va fizianz'nn he c'houde.
Ha c'houi, sant Joseph, he fried
Ouzhoc'h ho taou m'ea em erbed.

O Kaloun sakr euz va Jezuz,
Kaloun meurbed karanteuz,
Ra viot da viken karet
Ha da virviken adoret!

*Pater, Ave, Credo, Confiteor, Gourg'hemennou, Lita-
niou ar Verc'hez, De profundis, Angelus.*

PEDENNOU TREGER

Dioz ar beure ha diouz an noz.

En hano an Tad, hag ar Mad, hag ar Spered-Santel,
Evelse bezet gret.

Va Doue, me gred fermamant,
Penaos ezoc'h ama prezant,
Rak se gant guir humilite
Me rent hommach d'ho majeste.

M'hoc'h ador, Doue, va c'hrouer
M'hoc'h ador, Jezuz, va zalver,
C'houi-eg va mestr ha va roue,
Ha deoc'h oun tout korf hag ene.

M'ho trugareka, va Aotrou,
Demeuz oc'h oll madelezoù,
D'am beza krouet ha prenet,
Hag en oc'h Iliz resevet.

Kement a rin, a livirin,
A zonjin pe a andurin,
A offran oll da c'hloar Doue,
Dreizhoc'h Mari, mam a drue.

Eksamin a goustians.

Va Jezuz, roit d'in sklerijen
Evit ober va eksamen,
Hag eur goutrision barfet
A gement pec'hed am euz gret.

Va Doue, me zo glac'haret
D'ho pea kement offanset,
Abalamour d'ho madelez,
D'ho majeste, d'ho santelaz.

Me a brodet d'en em viret
Gant gras Doue, ouz peb pec'hed,
Spesialamant ouz ar re
Ma oun muia kustum d'ezhe.

Sellit ouzin, o va Jezuz,
Roit d'in eurc'hras presijuz
Ar c'hras d'ho servicha fidel
Ha d'ho karet heteg mervel.

Guerc'hez, va mam garanteuz
Va rekommandit da Jezuz.
Guerc'hez, va mam ha va itron.
Me rekommand d'ehoc'h va c'halon.

Ma El-Mad, messenger Doue,
 Miret va c'horf ha va ene,
 Va miret ouz an drouk-spered
 Ha dreist peb tra ouz ar pec'hed
 Me ho ped, Sent ha Sentezed,
 Da vea alvokaded ;
 Obtenit d'in digant Jezuz
 Eur maro mad hag evuruz.

Pater, Ave, Credo, Confiteor.

GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eun Doue hebken a adori
 Ha dreist peb tra oll a giri.
2. Doue en ven na doui ket,
 Na netra all demeuz ar bed,
3. Ar zuliou' santel a viri.
 Evit Doue ma servichi.
4. De dad, da vam a henori,
 Evit pell amzer ma vevi.
5. Muntret ne vi e nep feson,
 Nag a effet, nag a galon.
6. Dioual ouz al lubrisite
 Nag a gorf, nag a volonté.
7. Dommach ebed da zen na ri,
 Mar ac'h euz gret, hast rapari.
8. Gevier na nep fals testeni
 Mir birviken na liviri,
9. Ne c'hoanta dre luksur pec'hi,
 Nag en sonj vil n'en em bliji.
10. Madou re all ne zezir ket
 D'ho c'hemeret heb lealdet.

GOURC'HEMENNOU AN ILIZ

- f. Kleo devotamant pen da ben,
 Bep sul, bep goel, an offeren:

2. Sanctifla ri ar goeliou
 Var o hed, evel ar zuliou.
3. Kovez da bec'hejou heb mez,
 Da vihana bep bla eur vech.
4. Korf da Zalver a resevi,
 En amzer Bask, heb differi.
5. Iun a ri an daouzek deiou.
 Ar c'horreiz hag ar vijilou.
6. Da voener kig na zebri ket.
 Nag ivez d'ar zadorn nepred.

Litaniou Jezuz pe Litaniou ar Verc'hez, etc.

Akt a fe.

Me a gred ferm, o va Doue,
 An oll artiklou euz ar fe,
 Rak c'houi o c'heuz ho revelet
 Hag a zo guirion pa gomzet,
 Hag an Iliz a bropos d'in
 An artiklou-ze da gredin.

Akt a esperans.

Va Doue, va oll esperans,
 Enoc'h em va oll fians,
 Abalamour ma oc'h bepred
 Fidel d'ho ker, mad em andred.

Akt a garante.

Doue, leun a berfeksion,
 Me ho kar a greiz va c'halon,
 Abalamour ma veritet
 Dreist peb tra oll bea karet ;
 Va nesa a garan ive,
 Abalamour d'oc'h, va Doue,

Angelus, De profundis.



KANTIKOU

1. — ARAOK AR BREZEGEN

Spered-Santel, Spered a sklerijen,
 Plijet ganeoc'h enomp hrema disken
 A sklerijen kargit hor sperejou,
 A garantez tommit hor c'halonou.

An Ebestel, en eur zal asamblet,
 A dan ho kras oc'h euz bet oll karget ;
 Bet evidomp ar memes madelez,
 Ne d-oun, siouaz ! nemet sempladurez.

Guerc'hez Vari, esperans ar pec'her,
 Pedit Jezuz, ho mab hag hor Zalver,
 Grit d'hor spered koumpren komzou Doue.
 Ha d'hor c'haloun ho miret goudeze.

2. — PARCE, DOMINE

*Parce, Domine, parce populo tuo ;
 Ne in æternum trāscāris nobis.*

O va Jezuz, setu deut an amzer
 Da bardouni da c'hlac'har ar pec'her ;
 Nan, biken mui, bugel divad,
 Ne dreuzin dre ar pec'hed
 Kaloun va Zad. — *Parce, Domine.*

D'eoç'h, va Jezuz, pa'z oun koustet ken ker,
 Dre ho maro pa'z oc'h bet va Zalver,

Na lezit ket er vech-ma c'hoaz
 Da vont da goll ar gounid
 Eveuz ho kroaz. — *Parce, Domine*

Guir vab prodik, ama var va daoulin,
 M'ho ped, Jezuz, o pet truez ouzin.
 Gant va daelou ha gant ho koad
 Ma goalc'hit, ma az-goalc'hit,
 Oan dous ha mad. — *Parce, Domine.*

3. — EVIT AR VENEDIKSION

Adoromp oll e sakramant an Aoter,
 Eun Doue kuzet, Jezuz hor mesir, hor Zalver.
 Sperejou evuruz, prinsed euz he balez,
 Gant karantez ardant meulit-hen da james.

Guir Vab Doue, evidomp oll inkarnet,
 An env, ar mor, an douar oc'h euz krouet.
 Deut, va Zalver Jezuz, euz an abter, ho tron.
 Da rei brema d'eomp oll ho benediksiñ.

Henor ha gloar gant karantez eternal
 D'an Tad, d'ar Mab, ive d'ar Spered-Santel.
 Meulomp hag adoromp tri fersoun e Doue,
 Epad an oll amzer hag en eternite.

4. — EVIT DIGERI

EUR RETRED, PE EUR MISION.

Eun Doue a zeu d'ho kervel
 Ha da ginnig d'eoç'h pardoun ;
 Diredit d'an Iliz santel
 Da rei d'ezhan ho kaloun,

Diskan

Tostañt buhan, kristenien,
 Sentit ouz mouez Doue ;
 An deiz-ma dreist oll vo laouen
 Ha pinvidik d'oc'h ene.

Digor eo divreac'h hor Zalver
 D'ho starda gant karantez ;
 Rak glac'har guirion ar pec'her
 D'an Env oll'ro levezez.

Chadennoù pounner ha mezuz
 A bouez varnhoc'h marteze ;
 Tec'het oc'h, siouaz ! diouz Jezuz...
 Distroñt, en han' Doue !

Hag e veac'h evel eur vezen
 Heb deliou glaz na frouez,
 Dre zour nerzuz ar binijen
 C'houi a vleunio a nevez.

Digañeoc'h Doue ne c'houlen
 Nemed kaout bolontez vad
 Ha krial dre nerz ho peden ;
 Pardoun d'in, pardoun, va Zad !

Mar klevit hirio ar vouez
 A ginnig d'eoc'h baradoz,
 Selaouit... Fall-fall aliez
 E vez d'ar pec'her gortoz.

Va zikourit, Guerc'hez Vari,
 Da voalc'hi neat va c'halon ;
 Grit ma c'hellin heul a-zevri
 Pen-da-ben ar mision.

5 — EVIT ALIA AR PEC'HER DA OBER PINIJEN

Diskan

Poent ez eo d'eoc'h, pec'her, { bis.
 Distrei ouz ho Salver.

Digorit pelloc'h dor ho kalcoun
 Da Grouer ha Mestr peb unan ;
 Hir amzer zo, evel eur mignoun,
 E sko, e sko... ha na rit van.

Penaoz, va breur, vit kaout an tanva
 Euz bara c'houero ar pec'hed,
 E falfe d'eoc'h da viken guerza
 Oc'h ene paour d'an drouk-spered ?

Dre nerz Doue hag he vadelez
 Oc'h euz guelec' ar sklerijen ;
 Daoust hag enoc'h e c'houezaz buez
 Evit pec'hi, ha netra ken !

Taolit evez, atao var ziken
 Ez a hent riskluz ar pec'hed,
 Puns an ifern zo en ho kichen,
 Ha goulzkoude ne velit ket !

En ho kreiz, Satan en he zaou-bleg
 A guz ouzoc'h stad hoc'h ene ;
 C'houi, emezhan, zo beo-buezek...
 — Nan, maro oc'h dirak Doue.

Varnhoc'h eo savet eun dourn pounner
 Tec'hit... ar c'henta ar guella ;
 Didruez e vezo ar barnier
 Kalz tud, siouaz ! her goar dija,

Ema dibrenn an or a druez,
Dreizhi kerzit da gaout Jezuz ;
Jezuz ho stardo gant karantez
Hag hen ha c'houi vo evuruz.

6. — ARAOK AN TAOLENNOU

Sellit piz ouz an taolennoù
Zo mellezour an eneoù.
Hag a lavar da bep hini
Ar virionez, heb damanti. } *bis.*

Daou hent a zo, daout hent hebken,
Emaint digor dirak peb den :
Hent an ifern hag hent an Ee,
Hent ar maro, hent ar vue.

Hent an ifern frank ha ledan,
Dre ar pec'hed a gas d'an tan :
Darempredet eo bet atao
Gant kalz a dud, siouaz d'ezho !

Ourgouill, koler, luksur, avi,
Avaristed ha diegi,
Gant ar vesventi milliget,
A ra eleiz a dud daonet.

Brema eo d'eoc'h teuler eyez,
Lakaat urs vad en ho puez ;
Koll oc'h ene eo koll peb tra...
Re zivezad e ve lenva.

A greiz kaloun hag heb gortoz
Kemerit hent ar baradoz,
Kimiadit kren diouz ar pec'hed
Ha baleit heb nec'h ebet.

Rak ganeoc'h e vezo Jezuz
Ha ganthan e viot evuruz,
Euruz er bed, dre nerz ha c'hras,
Hag en Envou eurucoc'h c'hoaz.

7. — VAR AR FINVEZIOU DIVEZA

Sonjit, den faziet,
Sonjit en eternite !
C'houi, siouaz, zo dallet
Gant an drouk, ar vanite,
Sonjit e rankot mervel
Ha mont euz ar bed-ma
Pa zeui Doue d'ho kervel
Aberz nemeur ama.

Gant kalz a spount neuze
Ez it dirak ar Barnier :
Striz eo justis Doue,
Ha goaz a ze d'ar pec'her.
Eur zetans a resefet
A veuz pe varo,
Hag ar stad m'en em gevot
Da viken a bado,

Nemed eur vech hebken
Ar baradoz ne goller ;
Euz an ifern biken
En em denna ne c'heller !
Hogen baradoz kollet,
Setu tout eat da goll,
Ha baradoz gounezet,
Setu gounezet oll,

Roet en devez Doue
Ar choaz d'eoc'h e guirionez,
En eil p'en egile
Da vont divar hor puez :
En ifern p'er baradoz
E renkot chom atao,
Da zevi pe da repoz,
Goude préd ar maro.

Gant sonjal en traou-ze
Eaz vije d'eoc'h kimiada
Diouz kement d'oc'h ene
A ra eur gaou ar brasa ;
E leac'h klask tu da bec'h
C'houi zistrofe a-gren,
E leac'h en em beur-zaoni
C'houi rafe pinijen.

Goulzkoude oc'h ken dall,
Ken diboell, ken aheurtet,
Ma n'eus nemed traou fall
E pep korn euz ho spered.
Dievez var an affer
Euz ho silvidigez,
N'oc'h euz bet en he c'henver
Nemed leziregez.

Saveteit hoc'h ene
Ha d'an ifern renonsit,
Choazit abred an Ee,
Lakit ho poan d'he c'hounit
Dre 'nn euvrou a drugarez,
Dre an oll vertuziou,
Ha dre eur guir garantez
Vit Doue, hon Aotrou.

Kovesait a galoun
Hopec'héjou tremenet

Ha goulennit pardoun
O keuzia gant lealded ;
Reglit guc'loc'h ho puez
Heb kredi pell beva,
Ha tremenit peb dervez
Evel ho tiveza.

Ar bed a dremeno,
C'houi a dremeno ive,
An ifern a jomo
Epad an eternite.
Ar blijadur zo moged
A bad berrik amzer.
Ha bepred poaniou kalet
A voasko ar pec'her.

Tec'hit eta buhan
Divar hent fall ar pec'hed,
Pe var eur guele tan
Abred c'hui vo gourvezet.
M'oc'h euz diskouarn da zelaou,
Klevit ha klevit mad :
Choazit hirio an Envou,
Yarc'hoaz vo divezad.

8. — AR VARN JENERAL

Tavit, o tud heb kreden,
Gant ho komzou goullo,
Lezit peb sot prezegen
Ha sonjit mad hirio :
Dirak an env. ann douar
Öll e vezimp barnet.
An Eternel hel lavar,
He c'her ne jencho ket.

Diskan :

Guerc'hez, me gotez d'an gaouñ
Dirak ho madelez ;
Skei a ran var va feultrin,
Grit ma kavin truez.
Pa zonjan vezin barnet,
Va c'haloun ia bihan,
Rah aoun am euz da glevet
Daoned-oud, kerz d'an tan.

Sujidi ha rouanez,
Tud dizek, tud gouzisek,
Tud paour ha tud a zavez,
Ar barner, ar belek,
Dirak tribunal Jezuz
Peb hini iel d'he dro,
Hag eul lagad luc'heduz
Varnomp oll a baro.

Deiz a goler, a enkrez,
Deiz ruz glaou gant an tan,
Deiz estlammuz, didruez,
Tad ar spount, ar goelvan,
Deiz braz ar varn jeneral,
Petra harzo ouzid ?
Enoud eo skrijuz sonjal...
Krenit, pec'her, krenit !

Re zister eo nerz eun den
Vit gellout lavaret
Ar c'hemmesk hag an anker
A redo dre ar bed,
Pa vo digaset kelou,
Dre pep seurt goalinier,
E teu dervez an Aotrou
Hag eo tost ar Barner

Eun den, quir vab d'ar pec'hed,
Trenk he deod gant ar gaou,
Eul leon, eun tigr kounnaret,
Lemm-aoten he skilfou,
An Antekrist, en eur ger,
(He hano 'ra skrija)
A zeuio tri bloaz hanter
Evit flastra peb tra.

Fall, evel an drouk-spered,
Betek mel he eskern,
E teui gant eur fals profet
Hag oll nerz an ifern.
Kriz e vezo ar brezel
A rai d'ar gristenien ;
Neuze klenvel ha mervel
A ve dous ha laouen.

Ar bleiz, gouez goulskoude,
Pa gav an oanik paour,
Her sam, hel laz heb dale,
Hen debr var bord an dour,
An Antekrist a lamo
Tam-ha-tam ar vuez ;
Kant maro en eur maro
A roio dre hirnez.

Nebeudik a dud fidel
Dirak ar bourreo kriz,
Dirak an tan, ar gountel,
C'helle miret ho feiz,
Mes enep an enebour
E teui daou brofet braz
A herz Jezuz d'ho zikour,
Enok hag Eliaz,

Guelet e vezo neuze
En eac'h, var an douar,

Peb tra da venji Doue
O vonet e kounnar :
Ar c'hurunou a bigno
Var gein ar c'houlmoul du,
Tan glaz tro-var-dro d'ezho,
Da gas tout e ludu.

Ar mor braz eat digompez
Dindan nerz an avel,
A stlapo spount he vouez
Dre 'r vro a-bell a-beil.
Krozal rai en he goler,
Birvi, eonenna...
Torraod, kerrek ha reier,
Prest eo d'ho pruzuna.

Savet, evel meneziou,
Betek bar an ear,
E tilammo an tarziou
Da lounka an douar.
Ar steriou a gav d'ezho
E teu eun eil dour-beuz,
En em c'houeza reont dillo...
N'euz nemet brasoc'h freuz.

Ann douar gant an derzien
A gren he izili,
Gourdrouz 'ra betek Kreizen
Frailla ha digeri ;
Ar c'hrenva keariou brezel
A velan oll e kaon,
Hag ar meneziou huel
A ruil ho fen d'an traon.

Tud keiz, da glask ho puez,
Pe leac'h ve mad tec'het ?
Gant an ankou didruet
Allaz ! c'houi zo kelc'het.

Ma'z it e kleuz ann dorgen,
Draillet oc'h gant ar vein ;
Ma chomit en ho lochen,
Koueza 'rai var ho kein.

En env an denvalijen
Noz euz noz a stago,
An heol zo eur c'houlouen
Mouget evit atao ;
Al loar o c'houezi goad,
Ar stored o koueza,
An Envou oc'h horjellat
A c'hourdrouz oll freuza.

Allaz ! me glev o sini
Glaz estlamuz ar bed ;
An dud veo enn angouni,
Gant ar spount, zo kouezet,
An douar en em zigor
O strinka tan bep tu,
Ha n'eo mui nemed eur mor
Leun ar voagou tan ru.

Ouspen, ha prim ha dillo
An Env vo entanet ;
Dre 'r firmamant ne redo
Nemed tan ha luc'bed :
Tan en traon, tan en ear,
Ar bed oll zo e tan...
Ema great gant an douar,
Marv'mik eo peb unan.

9. — VAR AR MARO

Selaouit, ma Jezuz, selaouit ouz ma feden,
Ar maro zo spountuz, em maro deut d'am difen.

Diskan :

Guerc'hez Vari, va mam leun a drue,
Em maro, gant Jezuz, roit sikour d'am ene.

Pa zeui spes ar maro da spounta. va daoulagad,
Diskouezet d'in, Jezuz, bizach ha kaloun eun tad.

Pa zeui c'houezen ma zal ha ma diou jed dislivet
D'ober heuz d'ar re all, c'houi, ma Jezuz, tostaet,

Pa n'hellin ken klevet komzou an dud, ma Zalver,
Komzit, c'houi, d'am c'haloun gant ho mouez dous
[h' tener

Vit ar vech diveza pa larin : Jezuz ! Jezuz !
Klevit, o ma Zalver, ouz ho pugel truezuz :

Pa gouezo an daelou diouz ma lagad o vervel,
Bennigit-hi, Jezuz, grit ma vint daelon santel

O Jezuz, pa velot ma c'haloun baour o ranna,
Var mo foan, ma anken, skuillit eur beradik joa.

Pa vo red d'in kuitaat traou ar bed evit james,
Bezit, c'houi, ma Jezuz, ma mad, ma snvidigez.

P'en em zispartio evezz va c'horf va ene,
Resevit, va Jezuz, an ofrans euz va bue.

En ho parnedigez pa vezin, o va Jezuz,
Bezit dousem c'henver, roit d'in ar vuez euruz.

Me laka va feden, va buez ha va maro,
Etre daouarn Jezuz ha Rouanez an envo.

10. — VAR AR PURKATOR

Allaz ! ne c'houfe den koumpren
Pegen estlam eo hon anken !
Hor pinijen a zo kalet...
En han' Doue, hor sikouret !

Diskan :

Breudeur, kerent ha mignoned,
En han' Doue, hor zelaouet,
En han' Doue, hor zikouret !

A bed tu d'eomp n'euz nemed tan,
Tan var c'horre ha tan dindan :
C'houi hon euz-ni kement karet,
En han' Doue, hor zikouret !

Sonjit en ho tad, en ho mam,
Er purkator e kreiz ar flam :
Va mah, va merc'h, ah ! selaouet !...
En han' Doue, hor zikouret !

Ni n'hellomp dre hor pedennoù
Distan na berraat her poaniou,
Doue ouzomp ne zelaou ket,
En han' Doue, hor zikouret !

Da goustanti justis Doue,
Evidomp ah ! pedit bameda,

Dre aluzen, mar hor c'haret,
En han' Doue, hor zikouret !

Kalz a c'hellit dre ho poaniou,
Ho iuniou hag offerenou ;
Ken didruez na vezit ket,
En han' Doue, hor zikouret !

Ha pa vimp-ni e glear Doue
Evidoc'h ni bedo ive ;
Ouzomp eta oll selaouet,
En han' Doue, hor zikouret !

11 — AN IFERN

Diskennomp oll, kristenien, en ifern da velet
Doare trist estlammuz, an eneou daonet
Zo eno, dre vir Doue, dalc'het ebarz an tan,
O vezâ great goal zispign euz he c'hras er bed-man.

An ifern zo eun toul down, leun a denvallijen,
E leac'h ne veler morse'r bihana sklerijen ;
Ann doriou zo bet serret ha prenet gant Doue,
Ha n'ho digoro biken ; kollet eo an alc'houe.

Eur founn c'horet er bed-ma ne d'eo nemed maged
E kenver tan an ifern, tan eneou daonet :
Guell e ve devi enhi ac'hann'da-fin ar bed
Eget beza en ifern epad eun heur dalc'het.

Iudal a reont a boucz pen, evel chas kounaret,
Ne c'houzont pe leac'h tec'het, e peb leac'h int lesket ;
An tan zo var ho gorre, an tan zo dindanho,
An tan zo a bep kostez hag ho devo ato.

Ar mab a lam gant he dad, hag ar verc'h gant he
D'ho stleja gant mil malloz dre ho bleo'kreiz ar flam !
Malloz d'ehoc'h, greg diaked, hag oc'h euz hor ganet
Malloz d'ehoc'h, tad didalvez, kiriek oc'h oump kolêt !

Ho magadurez a vo da viken gant Satan,
An hirvoud, an dizesper, etouez ar goaziou tan,
Hag ho evach, ho daelou, .. beradik dour ebéd
'Vit ho muzellou disliv pe glaz gant ar zec'hed.

Ha kignet vo ho c'hroc'hen hag ho c'hig difreuset
Gant beg an aered-viber ha dent an diaouled ;
Hag en tan e vo ruillet ho c'hig hag ho eskern,
Evit ma tevo krenvoc'h founn skrijuz an ifern.

Goude ma vezint lesket eur pennadik en tan,
E vint taolet en eul lenn, leun a skourn, gant Satan,
Hag euz all lenn'barz an tan adarre vint taolet,
Hag euz an tan'barz an dour 'vel eul loc'h-houarn
[goeliet.

Neuze 'teuint da vouela, da vouela gant enkrez :
O pet ouzomp, ma Doue, o pet ouzomp truez !
Hogen en aner 'vouelint, rak tra bado Doue,
Epado ha ankeniou hag ho enkrez ive.

Ken tear e vezo an tan ho lesko en ifern,
Ma teui ar mel da virvi pen-da-ben ho eskern :
Petra dal goulenn truez, n'euz mui truez ebéd,
Kaer o devezo iudal, lesket e vint bepred,

An tan-ze zo c'houezet dre vuanegéz Doue,
Ne gollo ket euz he nerz hed an eternite ;
Biken na daolo maged, ha biken na zevo ;
Heb ehana d'ho leski biken n'ho distrujo.

12. — VAR AR GONTRISION

Doue, guir bried
D'an eneou,
C'houi c'h euz va c'hrouet,
C'houi c'h euz va frenet,
C'houi c'h euz va c'hrouet
'Vit an envou.

Guelomp eun Doue
Leun a garante,
Guelomp eun Doue
En he c'hilac'har:

Diskan :

Guerc'hez benniget.
Mam druezuz,
Me am euz lazet,
Dre veur a bec'hed,
Me am euz lazet
Ho mab Jezuz.

He dreid zo griet
Gant an tachou,
He gorf dispennet,
He ben kurunet,
He gorf dispennet
Gant ar fouetou.

Abaoue pell amzer,
Kovez ran ouzoc'h
Ez oun, va Zalver,
Siouaz l eur pec'her,
Ez oun, va Zalver,
Enebour d'eoc'h.

Guel hen divisket,
Savet er groaz,
He zaoarn staget,
He gostez touillet,
He zaoarn staget
Gant tachou braz.

Allaz l me zo bet
Bete vreman
Kalz re aheurtet
Ebarz em fec'hed,
Kalz re aheurtet
Chench a rankan.

Me eo, va Doue,
Me va-unan
Em euz heb true
Dre va goal vue,
Em euz heb true,
Kresket ho pouan.

Pignomp, va ene,
Var ar C'halvar.

C'houi a zo bepred
Eur guir Zalver,
Na c'houlennat ket
E ve den kollet,
Na c'houlennat ket
Koll ar pec'her.

D'ho treid e pokan,
Gant Madalen,
Re e talean,
Re bell e kasan,
Re e talean
Va finijen.

Gened koz bepred,
Bepred nevez,
Poent eo ho karet,
Salver benniget,
Poent eo ho karet
E guirionez.

13. — AN DIAOUL MUD

Pa zaulinomp evit kovez,
Hon enebour zo var evez,
Ema testik er c'hostez kleiz,
Diouallit..., braz eo he valiz.

Hanvet eo bet an Diaoul mud,
N'e ket heb guir en deuz goal vrud ;
Ifernia reaz kalz tud, siouaz l
Ha kalz re all a gollo c'hoaz.

Derc'hel kloz ginou ar pec'her,
Setu eno he oll vicher ;
Keit ha ma nac'her ar pec'hed
Her gout a ra : pardoun ebéd.

Kaer o pefe iun ha lenva
Ha lavaret *med culpa* :
Pec'hed a-guzer er galoun
Biken n'en devezo pardoun.

Great o pe, siouaz l kant torfed,
Mar kovesait, oc'h pardounet,
Grit eur pec'hed marvel hebken,
Mar hen nac'hit, pardoun bikem.

Euz eur remed a ro pare
 E rit eur poezoun d'oc'h ene,
 Hag e kreiz feunteun ar vuez
 E kavfet maro didruez.

It, a lavar ar c'houfesor,
 An env zo brema d'oc'h digor.
 Allaz ! d'an ampoent, dourn Doue
 A zo o serra dor an Ee.

P'oc'h deuet da govez, oc'h El-mad
 A Ioa oc'h-en em laouenaat :
 Diouzoc'h, gret ho sakrilaoh,
 Trist-oll e tistro he vizach.

Ann Diaoul a Ioa bet nec'het
 Gant aoun ne rankje kuit tec'het ;
 Mes ema brema adarre
 Lojet brao-braz en oc'h ene.

Gant ho teod gaouiad ar poezoun
 A zo kuset en ho kaloun ;
 Ha, siouaz d'oc'h, bete'r maro
 Kuzet ha kuzet e chomo.

An Diaoul mud gant he ardou
 A zalc'ho serret ho kinou,
 Ha rentet mud en ho puez
 C'houi varvo mud..., taolit evez !

14. — KANTIK FIN AR MISSION

Kavet em euz ar peoc'h hag an euruzted,
 Iac'h eo brema li laouen va ene,
 Dindan va zreid an ifern a zo klozet,
 Dreist an oabl glaz me vel digor an Ee.

Diskan :

O va Zalver, hirio, varc'hoaz ha bemaez,
 Ra vo meulet oc'h hano dudiu !
 Er mission em euz kavet ar vuez...
 Bennoz, bennoz, mil bennoz d'oc'h, Jezuz ! (bis)

Em goazied e red freskoc'h ar goad,
 Ne grenan mui terzien ar goal dechou ;
 Va c'halon baour ennon zo iaouankeat,
 Deuet euz d'in nerz da garet an Aotrou.

Pegen dous eo tanva ar guir garantez,
 Meuli Doue, hor C'hrouer hag hon Tad !
 Anaout, karet, setu bonheur an Elez,
 Setu ive bonheur ar c'hristen mad.

Diouz ar pec'hed e kimiadan da viken,
 Ne fell mui d'in hada danvez daelou.
 Var an hent fall ne gaver nemed anken,
 He letoun flour a zev evel ar gliau.

Ia, pec'herien, ho plijadur zo c'huero,
 Ha pebez spount pa vezo red mervel !
 Sonjit ervad, epad ma'z oc'h c'hoaz beo :
 Plijadur verr a den poan eternal.

Re zivezad em euz oc'h anavezad,
 O va Doue, ruzia 'ran gant ar vez.
 Re bell siouaz ! ez oun bet d'an droug-spered,
 D'ar spered louz, d'ar muntrer didruez

Hisiziken va ene ha va c'halon
 Ne glaskint kaout nemed c'houi da Aotrou ;
 Va c'horf ive, keit ma vezo ac'honan,
 A vezo d'oc'h gant he oll skianchoù.

Her gout a ran, bresk oun evel eur gorzen,
 Eun netraik a rafe d'in terri;
 Ar berad gliz o krena var an delien,
 Ne gouezfe ket buhanoc'h ' barz er pri.

Mar d-oun heb nerz, dispount oun evelato,
 Gant gras Doue n'em euz aoun rak netra:
 Ar gorzennik, p'en em stag ouz an dero,
 Zo diouallet en tourmant ar brasa.

Ouzoc'h, Jezuz, hag oizoc'h ive, Guerc'hez,
 En em stagan evit kaout ar goasked.
 Plijet ganeoc'h harpa va zempladurez
 Ha va dioual dre ho skeud benniget.

Pe guelloc'h c'hoaz, Jezuz, ar guir vinien,
 Ra'm bezo perz enn ho puez divin;
 Neuze, kaereat dre ar vertuziou kristen,
 Me vo eur bod golost a rezin.

Kourach ! kourach ! eur baradoz da c'hounit
 A dle lakaat ho kaloun da zridal.
 Kourach ! kourach ! poanit stard ha labourit,
 Eur gurunen zo du-hont ouz ho kedal.

15. — ANN ÈNE DEVOT DA JEZUZ

Va Jezuz, va Doue, c'houi hebken a zeziran,
 C'houi eo va c'harantez, enoc'h-hu ec'h esperan.

Diskan :

O va Jezuz, o va c'harantez,
 Bezit em c'haloun ha bemnoz ha bemdez

Va Jezuz, c'houi zo dous, c'houi a zo karantezuz,
 Va Jezuz, c'houi zo mad, c'houi a zo trugarezuz.

Bete vrema oun bet, siouaz ! en em abuzet
 Gant afferiou ar bed ha gant he vadou dallet.

Hogen hirio, Jezuz, me a ro d'eoc'h va ene,
 Va c'horf, va skianchou hag ar rest euz va bue.

Peger braz ez eo bet ho trugarez, va Kotrou,
 M'oc'h euz prizet dougen ar beac'heuz va fec'hejou.

Ah ! pebez karantez oc'h euz bet en hon andred,
 Da veza evidomp eur maro kriz gouzañvet.

Pegen euzuz eta, pegen drouk eo ar pec'het,
 Pa en deuz ho lazet, va Redemptor benniget !

O pec'hed milliget, dont a ran d'az detesti
 Ha n'am bezo pelloc'h ouzid nemed kasouni.

Pegen glac'haret-oun da veza bet offanset
 Eun Doue zo ker mad, ken din da veza karet !

Dre ho kras, va Jezuz, me bromet en em viret,
 Ar rest euz va buez, dioc'h peb drouk, dioc'h peb
 [pec'hed]

Sellit, o va Jezuz, a druez ouzin breman,
 Va zikourit d'ober oll kement a brometan.

Kinnig a ran d'eoc'h va buez ha va maro
 D'ho polontez santel me fell d'in plega ato.

16. — VAR AR GOMMUNION

Elez euz ar baradoz, sellit pebez henor
A ra deomp er zakramant Jezuz, hon Redemptor !
Eur vech evit hor prena ez eo bet inkarnet,
Hag evit dont d'hor maga ganeomp e chom bepred.

Diskan :

Mari, guir vam da Zoue, Mari, va mam dener.
Va zikourit da reseo ho Mab ha va Zalver,
Me ne d-oun stouaz ! netra, netra nemed pec'hed,
Mes enoc'h ec'h esperan, o va mam benniget

Krouer an Envy, an douar, var an aoter, bemde,
Dre gomz nerzuz ar belek, a zisken euz an Ee
Eun Doue, kalz hueloc'h eget ar firmamant,
En em izela dindan spesou ar zakramant.

Eun Doue ne jench james epad an oll amzer,
Eun Doue var half he zourn a zoug ar bed antier,
En em lez dre ar belek da veza diblaset,
Evit disken e kaloun ar paoura zo er bed.

O mirakl ar souezusa etre ar miraklou !
O burzud ne c'heli koumpren ar c'haera sperejou !
Evit gounit kalounou ho pugale ingrat,
Ho magit, o va Jezuz, gant ho korf hag ho koad

Nan, evit eur mab unik, ar vam an denera
Biskoaz ne santaz kement he c'haloun o tomma ;
Goude ker braz karantez, ha ! piou c'helfe refuz
Konsakri he oll galoun d'ho karèt, va Jezuz !

Mar d-eo dister kalounou ar Zent hagan Elez
Evit karet eun Doue ken din a garantez,
Penaoz e prizit Jezuz, dre ar gommunion,
Euz kalounou ker sklaset dont da ober ho tron ?

Penaoz kredi azeza ouz taol zakr eun Doue,
Goude beza offanset kement he vajeste !
D'ho taoulagad, va Zalver, ne c'hellomp prezanti
Nemed kalounou, stouaz ! leun a ingrateri.

Goulzkoude, pa gommandit tostaat ouz ho panked,
Dre euz gomz a drugarez effasit va fec'hed,
Teuzit sklash hor c'halounou gant tan ho karantez,
Neuze ni ho reseo gant joa ha santelez.

Prestit d'in ho tiouaskel, va El-mad soursiuz,
Ma nijin evel eur goulm etre divreac'h Jezuz,
Me roi dez'han va c'haloun, hen roi d'in he hini,
Eno me a repozo epec'h ha dizoursi.

17. — VAR AR GOMMUNION

Diskan :

Deut, va Doue, deut da ren em c'halon,
Deut d'am maga dre ar gommunion,

Va ene paour a zo ouz ho kortoz, va Zalver,
Evel eun douar ien, skarnilet gant goall amzer.

Mar d-eo guir ho komzou, c'houi a vezo d'am ene
Ar glao dous a bardaez pe glizennik ar beure.

C'houi eo ar pastor mad, me an danvad dianket ;
Edon kreiz ar bleizi, hag oc'h euz va diboaniet.

Mar d-oc'h ar medisin, me siouaz ! eo ar c'hlanvour,
Louzaquit ar gouliou great d'in gant va enebour.

Medisin, pastor mad, n'e ket aoualc'h kement-se,
Bez'ez oc'h em c'henver eun tad leun a garante.

Dre ma tostaan ouzoc'h ha dre ma tom va c'halon
Hi lavar ez oc'h c'hoaz he fried hag he mignon.

Rak-se 'ta va Jezuz, me zeu da glask ho panked,
Vel ma red ar c'haro feunteun, enn he zec'hed.

Siouaz ! piou ez oun-me da vont davedoc'h, Aotrou !
C'hoant am be da bellaat, pa zonjan em fec'hejou.

Hogen, c'houi oc'h unana c'houre'hemen d'in tostaat
Livrit 'ta eur gomz hag en em gavin e stad.

18. — ENN HENOR D'AR GALOUN ZAKR

O Kaloun Zakr euz va Jezuz,
Kaloun meurbet karantezuz,
Plijet reseo, me ho suppli,
An dezir am euz d'ho meuli.

C'houi eo ar zoursen presiuz
Euz ar grasou krenn ha nerzuz
A resevan, da bep mare,
Hag a douch kement va ene.

O Kaloun Zakr, c'houi 'zo eun or
Hag a velan bepred digor
Da zigemer ar bec'herien,
Pa fell d'he ober pinijen.

Bet oun siouaz ! o va Zaiver.
Dianaoudek en ho kenver,
Sellit ouz va eneingrat,
Distrei a ran galoun vad.

Torret am euz lezen Doue.
Kant ha kant mil guech em bue,
Muntrer infam, pec'her divad,
Trezet am euz kaloun va Zad.

Dirazhoc'h, Kaloun adorabl,
Me ra va amand honorabl :
Pardoun euz va zakrilachou;
Pardoun euz va oll fec'hejou !

Pardounit ivez ar c'hrimou,
Blasfemou, irreveransou,
Great bemdez gant ar baianed
Ha gant an oll heretiked.

Mez siouaz ! d'comp-ni kristenien,
N'hon euz bet nemed ienien.
Evit karantez hor Zalver
Er zakramant euz an aoter.

Stouet oll betek an douar,
Hor c'haloun rannet gant glac'har,
Kriomp gant eur vouez truezuz :
Pardoun, pardoun, Kaloun Jezuz !

Pastor mad, c'houi oc'h euz klasket
An danvad a ioa dianket,
Setu hen o c'houlen pardon,
Digorit d'ezhan ho Kalon.

Me garfe gant va goad goalc'hi
Va malis, va ingrateri,

Da viana me ho gouelo
Betek an heur euz va maro.

Ouspén-ze, en hoc'h ilizao,
Gant respet e rin pedennou,
Ha gant eur guir devosion
Me ielo d'ar gommunion.

D'an offeren ez in ive,
Gant feiz ha gant humilite,
Ofra rin eno d'ho justis
Ho Kaloun Zakr e sakrifis.

Esper am euz da rapari
Va malis, va ingrateri,
Dre verit ho koad presizuz
Hag ho Kaloun karantezuz.

Kemerit ivez, evit kred,
Kaloun ho Mam zo bet treuzet,
Eharz ar groaz, gant seiz kleze,
Dre an nerz euz he c'harante.

Unanomp brema hor moueziou,
Leveromp dre hor c'hantikou :
Gloar d'ho Kaloun, Salver Jezuz !
Gloar d'ho Kaloun, Mam druezus !

19. — MEULOMP OLL

Diskan:

Meulomp oll da james {
Jezuz hag he vadelezi { *bis.*

Me ho meul, o va Jezuz !
C'houi oc'h euz va c'hrouet,

C'houi oc'h euz va frenet,
C'houi am mag, o va Jezuz !

Mil bennoz d'eoc'h, o Jezuz !
C'houi a zo va fastor,
C'houi a zo va zenzor,
C'houi zo va oll vad, Jezuz !

Pardounit, o va Jezuz,
Va faoutou tremenet,
En amzer da zonet,
Me vo fidel d'eoc'h, Jezuz !

Bennigit, o va Jezuz,
Va c'horf ha va ene,
Va mirit noz ha de
Euz a bep drouk, o Jezuz.

Hastit, hastit, o Jezuz !
Terri va jadennou.
Ah ! pegoulz, en Envou,
Ho meulin-me, o Jezuz !

Ra vezo meulet Jezuz
Dre oll, da bep mare,
Ni bemnoz ha bemde
Meulomp oll, meulomp Jezuz.

20. — KANTIK AR BARADOZ

Jezuz, peger braz ve
Plijadur an ene,
Pa vez e gras Doue {
Hag en he garante. { *bis.*

Berr kavan an amzer
Hag ar poaniou dister,
O sonjal deiz ha noz
E gloar ar Baradoz.

Pa zellan en Envo
Hag strezek va bro,
Nijal di a garfen
Evel eur goulmik ven.

Pa vo pred ar maro,
Neuze me gimiado
Diouz ar c'hig ankeniuz,
Enebour da Jezuz.

Gortoz a ran gant joa
An termen diveza,
Hast am euz da velet
Jezuz, va guir bried.

Kerkent ha ma vezo
Torret va jadenno,
M'en em zavo en er
Evel eun alc'houeder.

Tremen a rin al loar
Evit monet d'ar gloar,
Dreist an heol, ar stered,
Me a vezo douget.

Eat pell diouz an douar,
Traonien leun a c'hlaç'har,
Neuze me rai eur zell
Ouz va bro Breiz-Izel.

Neuze me lavaro :
Kenavo d'id, va bro.
Kenavo, bed poaniuz,
Gant da bechoutroumpluz!

Kenavo, paourte,
Kenavo, vanite,

Kenavo, trubuliou,
Kenavo, pec'hejou.

Pelloc'h na zoujin ket
Ardou an drouk-spered,
Biken me n'em gollo
Goude pred ar maro.

Goud pred ar maro,
Gant joa me a gano :
Torret eo va jaden
Ha me libr da viken.

A bep tu pa zelin
Kement tra a velin
A rai d'am daoulagad
Had'am c'haloun mil vad.

Doriou ar Baradoz,
Digor ouz va gortoz,
Ar Zent, ar Zentezed,
Prest d'am digemeret.

Me vo digemeret
E palez an Dreinded.
E kreiz an henoriou
Hag ar meulendiou

Me c'hello, evit mad,
Guelet Doue, an Tad,
Gant he Vab eternal
Hag ar Spered-Santel.

Me a velo Jezuz,
En eur c'hiz dudiu,
O lakat var va fen
Ar gaera kurunen.

Ho korfou evuruz,
A lavaro Jezuz,
Oa tenzoriou kuzet
En douar benniget ;

C'houi zo, em baradoz,
Evel bokedou roz,
Divleuniel d'ar mare
Hag a vleun adarre.

Pegen dous 'vo klevet
Jezuz o lavaret :
Deut, servicher fidel,
Deut d'ar gloar eternal.

Evit poaniou dister,
Evit ankeniou ber,
Me vezo paet mad
Gant Doue, va guir dad.

Kaer e vezo guelet.
Ar Verc'hez benniget,
Gant daouzek stereden
A ra he c'hurunen.

Guelet a rin ouспен,
Gantho peb a delen,

Ele hag Arc'hele,
Oll o veuli Doue,

Guelet a raimp-ni c'hoaz,
Leun a c'hloar, leun a c'hras,
Hon tado, hor mammo,
Hor breudeur, tud hor bro,

Guerc'hezad a bep oad,
Sentezed a bep stad,
Gragez, intanvezed
Gant Doue kurunet.

An oll eledigou,
Var ho askelligou,
Ker mignoun, ker laouen,
A nijo dreist hor pen.

Euruzded heb he far,
Sonjal enoc'h me gar,
C'houi'ro nerz d'am c'halon
Pa gouez anken varnon.

En oll boaniou kalet
A gorf pe a spered,
Me zonjo deiz ha noz
E gloar ar Baradoz.

21. — AR ROZERA

CHAPLED A JOA

1. Sonjonp, d'ar genta dizenez,
Erjoa e devoue ar Verc'hez,
Pa oue gant an Elsaludet,
Da veza mam Salver ar bed.

2. En eil mister, sellomp Mari
O kuitaat he bro hag he zi,
Evit guelet Elisabet
A zouge sant Ian benniget.
3. En trede mister, hor Zalver
Zo ganet en eur c'hraou dister,
Hag a lavar d'eomp distaga
Hor c'haloun-diouz traou ar bed-ma.
4. Er pevare mister joaiz.
Ar Verc'hez gant he Mab Jezuz
En em offr en templ evidomp,
Gantho da Zoue en em offromp.
5. Er pemped mister, ar Verc'hez
A gavaz, goude tri devez,
He Mab e kreiz an doktored,
Leuna furnez hag a spered.

CHAPELED A GKUZ

1. Ar c'henta mister truezuz
A ziskouez d'eomp glac'har Jezuz,
Beuzet en eur c'houezen a c'hoad
Ha stouet o pedi he Dad.
2. D'an eil mister, e oue freuzet
He gorf santel a daoliou fouet;
Evit ar pec'hejou mezuz
E c'houzav eur boan ken euzuz.
3. D'an trede, e oue kurunet
He ben sakr, heb truez ebed,
Dre eur gurunen great gant spern,
D'hon dilivra euz an ifern.

4. Er pevare mister, Jezuz
Dindan eur groaz pouner mezuz,
A gerz etrezek ar C'halvar;
Heuliomp-hen oll leun a c'hlae'har.
5. Er pemped mister, Mab Doue
A ro evidomp he vue,
Piou a vezo c'hoaz ken ingrat
Da offansi Jezuz ker mad?

CHAPELED A C'HLOAR

1. Er c'henta mister gloriuz,
Kanomp meuleudi da Jezuz:
Savet eo bet devez ar bez,
Hervez he gomz, goude tri dez.
2. Jezuz en eil mister a c'hloar,
A zeu da guitaat an douar;
Sevel a ra d'ar baradoz,
Eno ema ouz va gortoz.
3. En trede mister, me a vel
O tiskan var-an Ebestel
Ar Spered-Santel, euz an Ee,
Pehini o rent tud neve.
4. D'ar pevare mister, Mari,
E kreiz ar joa, ar veuleudi,
Korf hag ene a zo douget
D'ar Baradoz gant an Eted.
5. D'ar pemped, e oue kurunet
Mari, hor Mam, gant an Dreinded:
En Env, rouanez an Ele
N'ankouao ket he bugale.

22. — K ONSEKRASION D'AR VERC'HEZ

Santez Mari, Mam Doue, e pep amzer guerc'hez,
Jezuz a zo va roue ha c'houi va rouanez ;
Evel ma'z eo va barner, bezit va fatrounez,
Hag evidon dirazhan bezit alvokadez.

Etouez ho servicherien me ho ped d'am réseo,
Meurbet eo dous ho servich, servich ar bed c'houero ;
Rak-se oc'h abandouni, dilezel ho preuriez,
A ve redet d'ar malheur d'en em goll da james.

Euz va ferz e prometan na rin na livirin
Netra enep hoc'h enor ; biken na bermettin
E ve den sujet d'in-me ken hardiz, ken ingrat,
Da offansi Mam Jezuz, eur vam ken dous, kermad.

Evit gallout henori an hano a zouget
A Vam a vizerikord, a Vam Salver ar bed,
Me a bromet soulaji ar beorien afflijet,
Dre ma'z int oll ar memprou euz ho Mab benniget.

Hed va buez, em euvrou va zikourit bepred,
Dreist ped tra var maro n'am abandounit ket ;
Dre ho taouarn d'am Zalver prezantit va ene,
Sur ez in d'ar baradoz dre ho sikour goude.

23. — EN HENOR D'AR VERC'HEZ

Diskan :

Bemdez, bemnoz hag e peb ti,
Meulomp Mari !

Pegen kaer eo ar c'hantikou,
Pegen euruz ar parreziou
Pa lavar oll ar c'halounou :
Meulomp Mari !

Plijet ganeoc'h, Sent hag Ele,
Unani ho mouez gant hor re,
Hor c'han a vo kaeroc'h neuze :
Meulomp Mari !

Ni zo da Vari konsakret,
Da Vari ni vezo bepred !
Kanomp eta gant joazded
Meulomp Mari !

Kalz a zoug respet da Vari
Ha kalz o deuz fizianz enhi,
Aman an oll a zo dezhi :
Meulomp Mari !

Mari, var an Elez renet,
An anaoun a boan tennet,
Torrit oll nerz an drouk-sperec
Meulomp Mari !

Mari, refuch e peb mare,
Mam dous bepred d'ho pugale,
C'houi hor c'hunduo da Zoue :
Meulomp Mari !

Mari, n'hellemp obten pardon,
Na trec'hi an dentasion,
Nemed dro ho proteksion :
Meulomp Mari !

Heb Mari ne ver ket salvet,
Gant Mari ne ver ket kollet,

Mari, ni a vo deoc'h bepred,
Meulomp Mari!

Selaouit, Mari, hor peden,
Hed hor buez deut d'hon difen,
Deut var hor maro d'hor zouten :
Meulomp Mari!

Mari, pa'z oc'h ken gallouduz
Bezit ive trugarezuz,
Hor prezantit d'ho Mab Jezuz :
Meulomp Mari!

Grit ma vezo justis Doue
Dous e kenver ho pugale.
Grit ma'z aimp da gana en Ee :
Meulomp Mari!

24. — DEVOSION D'AR VERC'HEZ

Diskan :

Ar voien d'en em asuri
Evez hor zilvidigez
Eo beza d'ar Verc'hez Vari
Devot epad hor buez.

Mari a zo Mam da Zoue,
Guerc'hez eo ar guerc'hezed,
Jezuz, hor zalver, hor roue,
Gant Mari zo bet maget.

Mari zo leun he dourn santel.
Euz ar grasou nerzusa,
Var he zervicherien fidel
Laouen 'vez ouz ho skuifla.

Mari zo pur dreist peb hini,
Guen eo dreist bleuniou an Ee :
Ma teuit a galoun d'he fedi,
C'houi vo pur ha chast ive.

Mari gant he zroad benniget
A zalc'h goasket pen Satan :
Dreizhi ni vezo diouallet
Diouz he flemm hag he alan.

Mari eo ar verelaouen
Var he zal liou kaer an aour,
Hi eo iec'hed ar glanvourien
Hag esperans ar pec'hour.

Mari en Env zo rouanez
An oll Zent ha Sentezed,
Dirazhi e stou an Elez,
He meuli a reont bepred.

Mari eo dor ar baradoz,
Dreizhi eo mont da Jezuz ;
Klaskomp eta kaout he bennoz,
Ma vezimp eun deiz euruz.

25. — GUIR VUGALE AR VERC'HEZ

Guir vugale ar Verc'hez a dle beza santel
* Hastartaate gras Doue, bemdez betek mervel.
An dud laosk-se ne rafent nemed fallgalouni,
Penaoz a c'helfent beza bugale da Vari ?

Guir vugale ar Verc'hez a vezo chast ha fur,
Strinka raint euz ho c'haloun peb elfen tan impur ;

Lent vezo ho daoulagad, ho ginou heb gevier,
Ne d-aint morse d'al lec'hioù a ve enho danjer.

Guir vugale ar Verc'hez, diouz an noz, ar m'intin,
Evit adori Doue a gouezo d'an daoulin :
Abred-ema ar pec'hed var roudou an hini
A zo, sionaz evithan, dieguz da bedi.

Guir vugale ar Verc'hez a gäro ho nesa,
Gant ar paour, en han' Doue, e rannint ho bara ;
Ober a raint joauzdet hag ho mam hag ho zad,
Dre ma vint dous ha santuz, hamad da labourat.

Guir vugale ar Verc'hez a vezo aketuz
Da vont, eur vech an amzer, betek aoter Jezuz,
Evit he zigemeret gant feiz ha karantez,
Ma bale, heb fazia, var hent striz ar vuez.

Guir vugale ar Verc'hez a vezo da Loue
Ho c'horf gant he skianchou. ho c'haloun, ho ene,
Kerzet raint er sklérjien, ho dourn e dourn Mari,
Betek an deiz ma velint an Env o tigeri.

26. — D'HOR MAM SANTEZ ANNA

Diskan :

D'hor mam santez Anna,	Kurun hag avel foll
D'an Itron Varia,	Varnomp zo dirollet,
D'hor Zalver benniget	Hor bro zo vont da goll :
Ni vo fidel bepred !	Truez ! mam benniget.

Hor c'halon baour mantret	Lezen Doue guechall,
Gant glac'har hag enkreuz,	Rene ker kaer ar vro,
Ni a zo daoulinet,	Hirio lezen tud fall
Dirazoc'hui Guerc'hez.	He stlej eün d'ar maro.

'Vel eur vanden chas	Sepl, dinerz, kerbian,
Gant kounnar, noz ha	Ma ne vent diouallet,
	Gant nebeut a boan
	Abred vezfent trec'hiet.

Emaint etouez an dud	Petra dalv guiziegez,
O klask mouga ar Feiz.	Mar gollomp hon ene ?
Ni zo guir kristenien	Ar skiant, ar furnez
Krouadurien Doue,	A zo oll e Doue.

Savet en he lezen	Guechall hon tadou koz,
En he zoujans ive.	Brudet 'vit ho furnez,
Ni a zo kristenien	A glasker baradoz
Prenet gant goad Jesus,	Araok ar guiziegez.

Maget dre c'hourc'he-	Skianchou zo netra
	Pa'z eont enep Doue ;
Gant he gorf presius.	Ni fell deomp dreist peb
Kristenien, hor baniel	Savetei hon ene. [tra

A zo kroaz hor Zalver,	Guerc'hez, hor mamsantel,
Ni her zao soun 'n huel,	Roit sikour ep dale.
Bemdez, e peb amzer.	E plegou ho mantel,
Eur vrezel griz meurbet	Kuzit hor bugale.

Zo great d'hor bugale ;	C'hui a zo galloùduz
Ah ! n'ho dilezit ket ;	Var galon hor Zalver,
C'hui zo ho mam ive.	Bezit madeleuz,
Ar falla kenteliou	C'hui zo eur vam denei.

Zo roet dezho bepred,	E pevar c'horn ar vro,
Koil a raint ho eneou	Neuze, ni oll, Guerc'hez,
E skol an Drouk-Spe-	Beteg heur hor maro,
[red.	Ni a gano bemdez :

27. — SANT JOSEPH

Diskan :

Sant Joseph, pried Mari,
Tad mager da Jezuz,
Ni fell d'omp oc'h henori,
Patroun karantezuz.

Mirer choazet gant Doue
D'he Vab ha d'ar Verc'hez
Bet oc'h euz en ho pue
Anken'ha levenez.

Evit digemer Jezuz
N'hoc'h euz na tan na ti ;
Ho kaloun zo evuruz
O tont d'hen adori.

Pa glask Herodes Jezuz
D'hen lakaat d'ar maro,
Gant pebez feiz burzuduz
Her c'hasit da bell bro !

Pebez poan lepad tri dez,
Jezuz a zo kollet ;
Goude, pebez levenez !
Jezuz a zo kavet.

Ho labour en deuz maget
Ho krouer, Mab Doue ;
En he labour, mestr ar be'
Ouzoc'h-hu a zente.

Var an douar trubuillet,
C'houi brema en Envou
A zo gallouduz meurbet :
Roit d'in va goullennou.

Jezuz a bleg d'ho peden
Hag he vam, ho pried :
Eur c'hras am euz da c'houlenn,
Eur c'hras d'in goullennet.

Pa vin galvet gant Doue,
Patroun ar maro mad,
Deut gant eun dorn a drue,
Serrit va-daoulagad.

Tost d'ehoc'h ha tost da Vari
E kichen tron Jezuz,
Ha z in en Env d'ho meuli,
Va fatroun evuruz !

28. — BREURIEZ AR FEIZ

C'houi oll a zo kristenien
Ha ne glevit-hu ket
Eur c'hri zo leun a anken
Euz pevar c'horn ar bed ?
Selaouit oll hor peden,
Hor c'hlemmou truezuz,
Selaouit petra c'houlenn
Ho preudeur malheuruz

Diskan :

Breudeur, ni glev ho klemmou
Euz an tu all d'ar mor ;
D'ho mouez ha d'hoc'h ezommo
Hor c'haloun zo digor.
Ni a roio aluzen
Evit sikour ho pro,
Ni a zavo belcien
Ha d'ec'h ni ho c'haso.

Kristenien a Vreiz-Izel,
O pet truez ouzomp,
Ar joazded eternel,
An Env, a c'houlennomp ;
Rak ni zo var an douar
Tud paour hag emzivad,
N'anavezomp, c'hui her goaz,
Na Jezuz nag he Dad.

Guech-all, bell diouz sklerijen,
Pell diouz lezen Doue,
Er menez tenvalijen,
Ho pro a iou ive
Mil behnoz d'an ebestel
O deuz ho keleñnet,
Grit kement all, tud fidel,
Brema en hon andred.

C'houi brema zo evurut,
P'oc'h euz ar sklerijen
Euz ar Feiz ker presiuz,
Ho pro a zo kristen,
Hag ar skerijen gaer-se
N'oufe disparisa,
M'ar deuit dre ar garante
En ho touez d'he maga.

Ma'n deuz Jezuz lavaret
Ne ankounac'ho ket
Eur verennad dour roet
D'ho preur en he zec'hed
Petra dalvo, kristenien,
Ar guennek benniget
Vo dreizhan da virviken
Kalz eneoù prenet ?